

# Zantik : Marion (beleg) Plouleh 1881 – Runan 1901)

Bet embanent e 1902

## Ar vuoh koz hag ar paotr-saout

Eur vuoh koz trubuilluz  
D'ar paotr-saout eun devez a gonte he glahar :  
« 'Vidon, emezi, war an douar  
Ne vo 'ta ken plijadur ebed ?  
Gwechall, me 'oa seder 'vel ne oe ket unan ;  
Bemdez d'ar prad 'vezen kaset,

Hag a-wechou, zoken, 'vid espern din ar boan  
'Barz ma hraou e veze laket  
Behiou yeot fresk deuz an dibab.  
Diwin<sup>1</sup> kammed den ne rer goap ;

Al lêzerez, dreist-oll, 'dee 'liez d'am gweled,  
Me 'oa he buoh muiañ-karet !

Mez 'baoe eur pennad 'zo diwin ne zeller ken  
Hag eur wech an amzer hepken  
'Vez roet din eun tamm foenn fall  
Ha, koulskoude, den n'hall lared  
Penaoz n'am-eus ket servijet,  
Dezu ma gwellañ, ma mestr gwechall :

Hep klemm, bepred am-eus sentet ;  
Nao pe deg leue 'm-eus douget ;  
Ha dre ma lêz ouspenn eur skoed  
En e hodell a zo bet kouezet.

Perag 'ta, evdion bremañ e ver ken kri' ?  
« Perag, 'me ar paotr-saout, n'eo ket diêz hen goud :  
Dispriza 'reer 'hanout 'balamour d'az kozni.  
N'haller ken, ma buoh kêz, goroi ahanout ! »

Gadn hemañ 'oa ar wirionez,  
Hag e respont 'lar dim diwall,  
Dreist-oll, deuz ar vignoned fall  
A gavom war on hent bemdez !  
Keit ha ma rofet deze sikour  
E klevfet gante komzou flour :  
Mez adaleg ma n'hallfet ken  
O zerviji dimeuz o hoant,  
Neuze avad ne gavfet den ;  
Laoked 'rint ahanoh hoh-unan !

---

<sup>1</sup> Diwin := Diouzin.